


A. Kontiñ an istor: an emgann Yarmouk hag an efedoù /10



Diell 2 :An eskob-meur armenian a gont efedoù an emgann

Ne c’helle ket ken impalaer ar C’hresianed* taliñ doc’h ar bagadoù arab . Ar re-se en em rannas e teir lodenn. Unan a yeas àr-zu Egipt hag e breizhas anezhi betek Aleksandria; an eil bagad soudarded arb a yeas betek an Norzh enep d’an impalaeriezh gresian hag e kemeras an tachennadoù a yeas ag ar Mor Kreizdouarel betek ar stêr Eufratez. E su ar stêr e kemeras ivez Edesse hag ar c’hêrioù ag ar Mezopotamia. An trede bagad a gerzhas àr –zu ar reter enep d’an impalaeriezh persan.

Istor Heraclius Sebeos, VII vet kantved

* An impalaer Bizañs anvet Heraclius eo. An arme Bizañs a stroll enni ar C’hresianed, an Armenianed, ar Slaved hag an Arabed kristen

Diell 1: emgann Yarmouk e 636


1. E men ha pegoulz eo bet an emgann Yarmouk? **E Syria e-tal ar stêr Yarmouk eo an emgann.**
2. Piv a zo enep piv? **Ar vuzulmaned renet get Al-Walid e oa eneo d’ar Vizañtiz renet get Heraclius, harpet get Gresianed, Armenianed, Slaved, Arabed kristen.**
3. Piv a zo e –penn pep arme? **Ar vuzulmaned renet get Al-Walid e oa eneo d’ar Vizañtiz renet get Heraclius, harpet get Gresianed, Armenianed, Slaved Arabed kristen.**
4. Piv a voe trec’h (gounezet)? **Ar vuzulmaned a voe trec’h.**
5. Petra eo an efedoù? **Gellet a ra ar vuzulmaned mont betek Mezopotamia**
6. Daoust e oa nebeutoc’h a soudarded en arme vuzulman, petra a lakaa ac’hanomp da brederiñ àr deknikoù emgann ar Vuzulmaned?

Implij a raent kezeg evit mont buanoc’h hag ivez tagiñ aesoc’h.

7. Petra eo anv ar seurt emgann ha tagadennoù savet get ar vuzulmaned? **An djihâd**
8. Kontiñ ar prantad: get skoazell an diellom ha respontoù ar goulennoù savit ur pennad àr an emgann Yarmouk hag rol an emgann-mañ e-barzh an emled vuzulman. (galloud a rit hueliñ ar plañ-mañ = lec’hiñ an emgann(e men, pegoulz), kinnig ar re a gemer perzh en emgann, displegiñ efedoù an emgann)

An emgann yarmouk e 636 , e Norzh Mor Marv a strolle an Arabed, renet get Al –Whalid enep d’ar Vizantiz, renet get Heraclius, skoazellet get Armenianed, Slaved, Gresianed. Nebeutoc’h eo ar Vuzulmaned hag trec’h int a-drugarez d’o zoareoù da dagiñ get kezeg. Dont a ran t e-barzh an impalaeriezh Bizañs hag e aloubant douaroù nevez: an emled soudardel eo àr an impalaeriezh krrsiten eo , an djihâd eo, ar brezel santel e vez graet ag ar seurt emgann-se.

B. En em lec’hiñ: /4



9. Petra a reprezant pe lizher? A, B,C, D

- A: buhez Mahommed**
- B: Hidjra divroadur Mahommed a Mekka da Yathrib**
- C: aloubadegoù an Omaiaded**
- D: Kêbenn Bagdad get dinastiezh an Abasised**

C. Roiñ termenadur ar c'heriaoueg: /4

10. Islam, souk, kalif, sîra

« sujidigezh da Zoue » en arabeg, ar relijion bet kelennet get Mahommed

« marc'had » en arabeg, karter ar c'henwerzh en ur gêr, pep straedé vout gouestlet d'ur seurt marc'hadourezh resis

Kalif : heritour Mohammed, da lâret eorener politikel ha relijiel ar vuzulmaned. Kalifad a reer eus an douaroù edan beli ar c'halif

Sîra : buhez-skridoù Mohammed


D. Sevel ur pennad: /2

11. Petra eo kefridioù ur voskeenn? Piv a c'halv ar fideled da bediñ ? Piv a ren an oferenn? E peseurt tu emañ troet ar fideled?

Ar muezzin a c'halv an dud fidel da bediñ en ur grapaat er minared. E-kreiz ar porzh ez eus ur feuteun evit gwalc'hiñ ha puraat ar c'horf. E-barzh ar salioù-pediñ, an dud fidel muzulman a c'hell troiñ àr-zu ar c'h-qibla a ro tu Mekka. Ar ar voger-se ez eus ar mirhab a arouez bezañs Mahommed hag ar minbar, ar gador evit an imam. N'eo ket nemet ul lec'h-pediñ ar voskeenn met ivez ul lec'h-studi ha diskuizh.

Priziadenn deroù an islam

A. En em lec'hiñ / 10



- 1.Mekka
- 2.Medina(Yathrib)
- 3.Jeruzalem
- A.Bizañs pe Syria
- B.Persia

← Hidjra 622

— Arabia

— emled ar vuzulmaned etre 632-661

— emled an arabed etre 661-751

- 1.Lec'hiit petra eo ar c'hêrioù 1, 2, 3
2. Petra eo anv an daou impalaeriezh A ha B?
3. Lec'hiit anvioù ar morioù ha meurvorioù.
4. Livit e glas Arabia, e melen emled ar vuzulmaned etre 632-661 hag e ruz emled an arabed etre 661-751.
5. Lakait ur bir a reprezentant divroadur Mahommed e Yatrib(Medina) ha skrivi t anv ha deziad get lizherennoù bihan.
5. Lakait un titl d'ar gartenn ha savit an alc'hwez.

B. Sevel ur pennad: / 3.5

6. Ur beajour oc'h e 740 hag ho peus ur pennad da sevel evit kinnig ar gêr Bagdad:implijit ar c'heriaoueg-mañ, sevenadur(el), astronomiezh, levraoueg, hammam, palez ar c'halif, souk, moskeenn. Arabat disoñjal displegiñ pep ger implijet.

C. Ar c'hredennoù:

7. get ar skeudennoù kavit petra eo pilierioù an islam? / 2.5



1



2



3



5

D. Deskriñ ur voskeenn / 4



8. Displegit petra eo an hini A, B, C, D ha roit termenadur pep hini

B. Sevel ur pennad

Me zo e Bagdad, ur gêr vras get ur million annezidi savet get ar c'halif Al-Mansur e 762, kroazent kenwerzhel etre Afrika, Indez ha Sina. Ur gêr kenwerzhel emañ , gwelet get ar souk, ar marc'had e-lec'h e c'hellan kavout a bep seurt traoù da breññ, ivez get karavanennoù a yae da Bagdad evit gwerzhiñ o froduioù. Palez ar c'halif a zo e-kreiz ar gêr kelc'hiet get mogerioù-kreñv: ennañ e labour miliadoù a dud evit ar c'halif. Sachiñ a ra ar c'halif skiantourien evit labourat àr tachenoù a bep seurt èl an astronomiezh, ar matematikoù, sifroù) hag ar medisinerezh. Troet e vez levrioù an Henc'hres él Aristote , Persia el levraoueg vras ar Furentez. Kavet e vez ivez kalz a hammam, salioù-dour en arabeg.

_____ : an titouroù ret da lakaat

C:

1 pediñ pemp gwech bemdez

2 piric'hinaj e Mekka

3 roiñ an aluzen d'ar re baour

4chom àr yun da vare miz ar Ramadan

5krediñ nemet en un Doue Allah hag e brofed Muhammad

D.

A QIBLA

BMIRHAB

CMINBAR

D SAL-PEDIÑ